


DA ZANTEZ VENTROK**Pe Santez Ediltrud****PATRONEZ TRELEZ**

Ar Pardeun braz a vez ato d'an 23 a Even

VAR DON : *D'hor Mamm Santez Anna.***DISKAN :**

*Patronez benniget,
 Truez, enn han Doue !
 Pedit, pedit bepred
 Evit ho pubale.*



1
 Brud euz ho madelez
 A zo eat tro var dro :
 Pell dioc'h douar Trelez
 Kals a veul hoc'h hano.

2
 En hanv ne veler ken,
 A gleiz, a zeou, bemdez,
 Nemet pardounerien
 O tont var zu Trelez.

3
 Piou, e pevar c'horn Leoun,
 Ne gas beteg ann Ee
 Ezommou he galoun,
 Dre ho tourn, da Zoué ?

4
 Nag a dud enkreziat,
 Nag a dud enn ankenn
 A zeu eaz ho spered
 O poket d'ho skeudenn !

5
 Nag a bet a veler,
 Goude m'ho deus pe let
 A zirag hoc'h aoter,
 O sevel laouenet !

6
 N'euz poan na guentr ker kriz,
 Na seurt klenved spontuz
 Ne gav enn hoc'h Illiz
 Eur pare burzuduz.

7
 A flac'hou digaset
 A bep tu da Drelez
 Ha ne ganont-hi ket
 Galloud ho trugarez ?

8
 Distrei a rit pell-zo,
 O mamm madelezuz,
 Diouzomp, dioc'h hor bro
 Pep klenved donjeruz.

9
 Peleac'h e ma ann den
 En deus gullet lornez,
 Kolera pe bosenn
 O kontammi Trelez ?

10
 Bennoz deoc'h, mil bennoz,
 O Santez dous ha mad,
 A zalc'h varnomp deiz-noz
 Digor ho taoulagad !

11
 Hoguen, var ann douar,
 Ne zeuz lornez ebed
 Hag a ve (piou n'her goar ?)
 Louz evel ar pec'hed.

12
 Al lornez euzuz-se
 Kasit pell diouzomp ;
 Grit ma skuillo Doue
 Puill he c'hrasou varnomp.

13

Dija, meur a vloaz 'zo,
Eur barr avel diroll
A c'houez/put var hor bro :
Mirit na zaimp da goll !

14

Kendalc'hit, enn hon touez,
Didach feiz hon tud koz,
Ma c'hellimp eunn dervez,
Mont holl d'ar Baradoz.

15

Guehall-goz hon tadou,
Brudet dre ho furnez,
A glaske ann Envou
Araok klask ann danvez.

16

Kaout madou n'eo netra
Ma vank doujans-Doue :
Red eo deomp da genta
Savetei hon ene.

17

O c'houi, c'heuz disprijet
Ama yar an douar
Follenteziou ar bed,
Danvez, kurunenn, gloar :

18

Grit na stagimp morse
Hor c'haloun oc'h madou :
O senti cuz Doue
E kavimp ann Envou.

19

Grit ma vezo a grenn
Ann tadou, ar mammou,
Heb mez guir gristenien
Enn ho ziegestiou.

20

Goulennit, mamm dener,
Ma vezint aketuz
Da ober ho dever,
Enn ho buez p'banuz.

21

Sentuz, fur ha dinam
E vez ar vugale
A gav digant ho mamm
Abred leaz d'ho ene.

22

Grit ma vezimp leal
Ato gant pep unan :
Madou zeu dre 'n hent fall
Ne dint nemet koat tan.

23

Ra vo, e guirionez,
Dous, humbl hor c'halonou :
Flammoc'h e chom ar guez
A gar ann draoniennou.

24

Grit ma vezo bepred
Didach-keer hon ene :
N'euz hent berroc'h ebed
Evit mont da Zaoue.

25

Grit ma kerzimp gant feiz
Var ho roudou santel ;
Ma karimp ann Illiz
Hor mamm beteg mervel.

26

Neuze, tost da Vari,
Eunn dervez gant Jezuz,
E zaimp holl d'ho meuli,
O Patronez euruz !

6 Janvier 1885

IMPRIMATUR

SERRE,

Vicaire général,